

# Alan Stivell, Ar Wezenn Awalou

Kanomp peb ur ganaouenn broman war un ton trist  
Koue'et eo ar we'enn awalo er bla-man n'o ket jistr

Un noswezh glaw hag awel e-kreis mis Gwengolo  
Eo digouezhet ur gwalleur war ar we'enn awalo

Ur gwalleur'so digouezhet, o ya, war mamm ar jistr  
Gou't a rit 'ta roulerien an dra-se a so trist

Kris ha kaled eo klewoud konta deus ar gwalleur  
So digouezhet an deiz all en tu da drao al leur

Houma oa ar c'haerra gwe'enn e oa bet'barzh ar vro  
En doa laket alies kals a dud da gano

Da gano ha da zansal peb hini gis e vro  
Me eo paotr Yann ar soner en eus bet graet va lod

Bet on bet pell diouzh ar gr, bale dre av vroio  
Netra m'eus kawet gwelloc'h 'wid an donc awalo